

Ermit admirabl, paour humbl, eskob santel,
Roït ho pennoz d'ho pugale fidel ;
Roït ho skoazel d'hor parresiou kristen
Ha d'hor beleien.

IMPRIMATUR :

Corisop., die Julii septimo 1900.

F. CORRIGOU,

Vic. gén.

Pardon chapel Sant-Korantin, e Ploudiern, a vo bep
bloas d'an eil zul a viz Gouere.


Kemper, moullet e ti DE KERANGAL.

8N2-3-041

Chouvi Algrall
Pour le benediction de la

disette de Kerangal le 22 Jan 1900

GUERZ SANT KORANTIN



TON : Pange solemnes.

DISKAN :

Kanomp, pobl fidel, kanomp a wir galon,
Kanomp oll hirio meuleudi hor Patron,
Da zant Korantin, gant eur vouez laouen,
Kasomp hor neder.

A ligner huc laouen, e c'hanel
Er skiant, er studi gant he dud oue savet ;
Hag a vianik kement a c'houlenne
Oue karet Doue.

E douar Ploudiern, var dro he ugent vloaz,
'Bordik koat Nevef Korantin 'n'em dennaz ;
'Vit he ermitach, e c'harz treid eur wezen,
'Savas eul lochen.

Eno deiz ha noz n'em roe d'ar beden,
Eno e iune hag e ree pinijen,
'Vit beza santel ha mignoun da Zoue
En humilite.

Ploudiern

'Kichen he lochen, e dour skler eur feunteun,
E zba eur pesk beo-buezec o neun;
Bemdez 'vit he bred ar Zant, pebes estlamm!
A drouc'he eun tamm.

Goudeze en dour hen taole a nevez;
Ar pesk en he bez rentet leun a vuez,
D'an ermit santel a bourvee bemdez
He vagadurez.

Hor Zantik iaouank, gwisket paour ha diarc'hen,
A ie dre 'r c'harter da glask an aluzen;
Hag evit paea he vadouberourien
E ree he beden.

O veza klevet menek eus sant Primel
E kerzas a-bell da gaout an den zantel,
'Vit deski gant 'han c'hoaz brasoc'h santelez
Ha brasoc'h furnez.

Gant he dud-jentil, eun deiz ar roue Grallon
'Zeus da chasseal e goelet ar c'hoat doun;
D'an abardaez, gant an naoun, ar sec'het,
E oant dinerzet.

Ha sant Korantin, o miracl ar brasa!
Gant he besk bihan hellaz oll ho maga;
Dirak 'seurt burzud, Grallon en he speret
Oa oll estlammet.

D'an ermit iaouank e roaz eur maner,
'Vit ober eur gouent, hag heno digemer
Bugale ar vro, evit ho c'hentelia
Hag ho c'huzulia.

Eur pennad goude, o velet he skiant vraz,
Ouz ar roue Grallon ar bobl a c'houlennas
Her c'haout da eskob, evit ren bro Kerne
E doujans Doue.

Neuze ar roue a gasas Korantin
Da Dours e Bro-c'hall da gaout sant Martin;
An eskob santel gant joa hen resevas
Hag her c'honsakras.

Pa oue konsakret ha distro da Gemper,
Ar bobl gant dudi reas dez'han digemer;
Hag ar roue Grallon dez'han gant madelez
Roas he balez.

Kerkent Korantin gommans he labourou
'Vit prezek ar feiz ha sevel ilizou,
Rei da asnaout ar wirionez christen,
Doue hag he lezen.

Epad pell amzer en hor bro Breiz-Izel
Gant nerz ha douster e skign an Aviel;
En zo e gwirion tad feiz coz hon tadou,
Tad hon eneo.